


213-1048

KANTIKOU
NEVEZ



KANTIKOU NEVEZ

I. — Kantik an Oferenn

(var don: *O Kalon zakr*).

Diskan

Kinnigomp holl ar zakrifis
Gant hor mamm zantel an Ilis
Sakrifis divin Hor Zalver
En em ginnig var an aoter.

1

E sakrifis an oferenn
Jezuz a ra d'e veleien
Nevezi 'n eun doare dispar
Sakrifis bras Menez Kalvar.

2

An oferenn !... Pebez tenzor
Dreizhi Doue a gav enor ;
Dreizhi e teu d'hon eneou
Bennoz Doue gant e c'hrasou.

3

Va Doue, d'eoc'h e kinnigan
Gant resped an oferenn-man,
D'hoc'h adori, da ziskleria
Ez oc'h hor Mestr ha Mestr pep tra.

4

Ouzpenn, 'vit ho trugarekât
Da veza 'n hor c'henver ken mat :
Holl diganeoc'h hon eus bemdez
Madoberou, grasou nevez.

5

Siouaz ! 'n hor huez tremenet,
Omp kouezet mil guech er pec'hed ;
Jezuz, dre verit ho poanion,
Pardonit deomp hor pec'hejou.

6

Dre an oferen-man ive,
Plijet ganeoc'h, o va Doue,
Pa 'z eo ken paour hon eneou,
Rei deomp aluzen ho krasou.

7

Kinnig a reomp an oferen
'Vit ezomou ar bed kristen
Mez evit tud ar barrez-ma
E fell deomp pedi dreist peb tra.

8

Dre nerz ar zakrifis santel
Ra vo diouzomp kaset pell
Al leondouet, ar gasoni,
Ar pec'hed vil, ar vezventi.

9

Ouz an anaoun, o va Jezuz,
Grit ive eur zell truezus,
Ha varnho lakit da ziskenn
Ho koad sakr evel eur c'hizenn.

10

Ra vo heb dale diboaniet
Hor c'herent hag hor mignoned ;
Roit dezho, dre an oferen,
Ar peoc'h a bado da viken.

1

Guerc'hez Vari, va Mamm garet,
E harz ar groaz ken glac'haret,
Va zikourit da skriva don
Pemp gouli Jezuz em c'halon

12

Ha c'houi, holl zent ha sentezed,
Ha c'houi, holl elez venniget
Hor zikourit dre ho pedenn
Da glevet mat an oferen.

II. — Eil Kantik an Oferen

(var don: *Ni ho salud, Rouanez an elez*).

Araog ar Gorreou

1

O kristenien, deut omp d'an oferen
'Vit kaout hon lod er zantela pedenn
Evit kinnig d'an Doue galloudus
Ar bleññiou ruz eus Pasion Jezuz.

2

En oferen bezomp leun a evez,
Leun a zoujans, a feiz, a garantez,
Evel Mari hag ar merc'hed santel
Dirag Jezuz er C'halvar o vervel.

3

Var an aoter, koulz ha var ar C'halvar,
Jezuz d'e Dad a ginnig e c'hlaç'har,
E gorf roget gant skourjezou flemmus,
E benn gant spenn kurunet truezus.

4

Kinnig a ra e dreid hag e zaouarn
Treuzet skrijus gant an tachou houarn
E galon baour flastret gant an anken,
E vuez holl evit ar bec'herien.

5

An oferenn eo Jezuz hag e groaz;
En hon daouarn e laka madou bras :
Holl draou ar bed e-skoaz eun oferenn
'Zo nebetoc'h eget eur vogedenn.

6

En oferenn adoromp an Dreinded :
An Tad, ar Mab, ar Spered a c'hlanded ;
Netra, kerkoulz ha Pasion Jezuz,
N'hell enori an Tri Ferson eürus.

7

En oferenn trugarekaomp Doue
'Vit ar grasou a skuilh varnomp bemde :
Heb Hor Zalver omp paour ha reuzeudik,
Mez gant Jezuz ni a zo pinvidik.

8

En oferenn goulennomp mat pardon
Euz ar vouilhenn a vastar hor c'halon :
Gant gwad Jezuz ni a zo bet prenet,
Gant e wad sakr ni 'vez ive gwalc'het.

9

En oferenn goulennomp hirvoudus
Grasou nevez evit bale nerzus,
Bale nerzus, harpet var Hor Zalver :
Rak, dre natur, ni 'zo bresk ha dister.

10

En oferenn pedomp 'vit an Iliz,
'Vit an anaon a c'houzanv poaniou krist.
Pedomp 'vit Breiz, evit an holl vroïou,
Ma vo Jezus Mestr an holl galonou.

Goude ar Gorreou

11

Var an aoter, e lec'h gwin ha bara,
N'eus dirazomp nemet Jezuz brema.
Jezuz 'n e bez, gwir den ha gwir Doue !
Pebez burzud ha pebez karante !

12

O va Zalver, var hon daoulin stouet,
Ni hoc'h ador gant mil ha mil resped,
Ha ni a gan gant aelez an neñveü :
Santel, santel, santel eo an Aotrou !

13

Ni hoc'h ador dindan spesou dister
Aman ouzomp e kuzit ho splannder,
Mez er bed all, ma heuliomp ho lezenn,
Ni ho kwelo e kreiz ar sklerijenn.

Goude ar Gommunion

14

An oferenn nag hi 'zo priziuz
Nag hi 'zo mat, ha kaer, ha dudius !
Ma komprenfemp he holl zalvoudegez,
Ni a varfe, beuzet el levenez.

15

Mil bennoz d'eoc'h, o Salver benniget :
An oferen he deus hor c'hennerezet.
Ni 'ya breman, laouen hor c'halonou,
Da stourm ervat enep hor gwall dechou.

III. — Kantik en enor d'ar Zakramant

(var don: *Oh! l'auguste sacrement*).

Diskan

Adoromp Doue
E sakramant e garante } *bis*

1

O sakramant burzudus
Leac'h omp maget gant Jezuz ;
Ennhan ema Hor Zalver :
Kredi a ran var e c'her.

2

Jezuz, d'an noz kent mervel,
Ro galloud d'e ebestel
Da jench ar bara, ar gwin
N'e gorf hag e c'hoad divin.

3

Ar velelen, d'ar gorreou,
A gonsakr gant e goimzou,
Ha Jezuz, Mestr bras ar bed,
Ouz o mouez a zent bepred.

4

Heb kuitaat e varadoz,
E chom aman deiz ha noz,
Chom a ra en hon touez,
Dalc'het gant e garantez.

5

Eus ar gwin hag ar bara
Petra jom ! Ne jom ken tra
Nemet ar spesou dister
A guz korf, goad Hor Zalver.

6

Aman n'hellomp ket kompren ;
Ar feiz hebken hor c'helen...
Gant ar feiz sklerijennet
Ne fazi ket hor spered.

7

E doare ar sperejou
Eo n'em laket en hostiou ;
Pa vez an hostiou torret,
E gorf sakr n'eo ket rannet.

8

Neb ia d'ar communion
Gant ar pec'hed 'n e galon
A gemer skouer var Judaz
Hag a ra eun torfed bras.

9

Mes pa vez, araok tostaat,
Ar goustianz e stad vat,
Unanet gant Hor Zalver,
Gwir eured e kaver.

10

Meulomp, karomp, adoromp
Eun Doue ker mat ouzomp ;
Ret eo sonjal dreist pep tra
En e zonezon gaera

IV. — Holl da Zoue

(var don: *Nous voulons Dieu*).

Diskan

Klevit, o Mamm a druez,
Pedenn hon tadou koz ;
Holl da Zoue epad hor buhez
Holl da Zoue er baradoz

bis

1

Ni gar Doue e penn hor skolioù,
Hepdan skol vat ne gaver ket ;
Ni gar Doue en hor lezennou,
Hepdan nag urz na peoc'h ebet !

2

Ni gar Doue var hor menezioù
Ni gar Doue var hor mor glas,
Ni gar Doue e kreiz hor c'hoajou,
En hor c'halonou mil gwech c'hoaz

Ni gar Doue en hor pardonioù,
Doue a ra hon levezet !
Ni gar Doue en hon eureujou,
Doue hor joa hag hon danvez !

4

Ni gar Doue, ni gar e lezenn ;
Pell diouzomp, tud dizoue !
Ni gar Doue, ni gar ar bedenn,
Doue eo mezur hon ene !

5

Ni gar Doue hag e groaz santel
Var gement hent, e kement ti ;
Kroaz Doue a zo hor skoazel,
Hor miro da fallgaloni !

6

Ni gar Doue, o tud digreden,
A c'hoanta hen diskar er vro ;
Ni lavaro gant hor feiz kristen :
Kentoc'h mervel ive d'hon tro !

7

Holl da Zoue hor bugaligoù,
Hon tud yaouank o vent er bed !
Holl da Zoue, gant hor priedou,
Hon tud koz var hent ar vered.

8

Holl da Zoue hor martoloded
En doun-vor dare da dremen !
Holl da Zoue hor gwir zoudarded
E kreiz an tan, var an dachen.

9

Holl da Zoue e traon an Arvor,
Var ar menez hag en Argoat !
Holl da Zoue....! Setu hon enor,
Setu hon nerz e pep stourmad !

10

Holl da Zoue ! An hano kaer-man
Hon harpo ouz an dud difeiz.
Holl da Zoue ! Skrivomp anezan
Var gement karreg 'zo e Breiz.

11

Holl da Zoue ! E pred ar maro
Doue d'e dro n'hon nac'ho ket !
Kement kristen mat a lavaro :
Biskoaz Doue n'am eus nac'het !

V. — Da feiz hon tadou koz !

(var don: *Sainte religion*).

Diskan

Da feiz hon tadou koz, ni pôtre Breiz-Izel,
Ni zalc'ho mat ato,
'Vit feiz hon tadou koz hag endro d'he banniel
Ni holl en em stardo.
Feiz karet hon tadou, morse ni ho nac'ho,
Kentoc'h ni a varvo! (*ter*)

1

Keit ha ma lugerno, e bolz uhel an nenvou,
Ar stered hag al loar hag an heol henniget,
Ni a gerzo divrall gant hent ar gourc'hemennou
Hag a vevo dalc'hmatac' vel gwir gatoliked.

2

Keit ha ma vezo mor da luskellat Breiz-Izel,
Da floura he aochou, da hokat d'he reier,
Kristenien e chomimp, en despet d'an holl vrezel
A rañ deomp an dud fall, marc'hadourien geier.

3

Keit ha ma savo brug var gribenn hor menezioù,
Ha ma tougo al lann bokedou alaouret,
Morse ne droimp kein da feiz karet hon tadou :
Ni 'zo eus an ouenn dud o deus pennou kalet.

4

An dero bras, o stourm ouz an avel kounnaret,
A dorr kent 'get plega, hep chal gant ar maro ;
'Vel-se ni a zalc'ho penn d'ar bed, d'an droug-
[spered,
Ha ne blegimp biken, kentoc'h ni a dorro.

5

An Iliz, rodellat endro da c'har ar vezenn,
Daoust d'an amzer diroll, a jom stag mat ato ;
'Vel-se, ouzoc'h, Jezuz, en em stardomp da viken,
Ha diouz ho karantez netra n'hon distago.

6

Ni a vo kristenien, neket hepken dre gomzou,
Mes dre an oberou skuilhet en hor buhez ;
Pedenn hag oferenn, vijil ha sakramanchou....
Ni 'heulio penn-da-benn gwenojenn ar furnez.

7

Kenavo evit mad d'an holl c'hoarioù noazus,
D'an dansou milliget a zaon mil ha mil den.
Na glaskomp ket plijout da Zatan ha da Jezuz ;
Ne c'hellomp servicha nemet eur mestr hepken.

8

Ni 'zo Bretoned yac'h, dispart e-giz hon tadou ;
Birvi a ra ennomp kalon ar gwir zoudard.
Eur Breizad hag a dro da heul ar fals-kredennou
N'eo ket eur gwir Vreizad, n'eo nemet eun tru-
[bard !]

9

Mêz eta d'ar c'hrener, d'an trubard ha d'an na-
[c'her !]
N'e z'eus var an douar netra ken divalo
Ni a jomo bodet dindan banniel Hor Zalver,
Ato a-du gantan, er vuhez, er maro !

VI. — Kenteliou ar Groaz

(var don : D'hor mamm-santez Anna).

Diskan

Kanomp holl, kristenien,
Kanomp a vouez huel :
Breman ha da viken
Enor d'ar Groaz santel !

1 — *Kroaz an tour.*

Divar beg an touriou
Ar groaz ' lavar dalc'hmat :
« Kristenien, d'an nenvou
Savit ho taoulagad ! »

2 — *Kroaz an hent.*

Ar groaz var an henchou
'Lavar d'an tremener :
« Gwir hent bro an nenvou
Eo hent kroaz Hor Zalver. »

3 — *Kroaz an ti.*

Dirag holl dud an ti,
Ar groaz ouz ar voger
A zesk da bep hini
Derc'hel mat d'e zever.

4

Deski 'ra d'ar bugel
Beza hepred sentus ;
Senti betek mervel
Zo bet buhez Jezuz.

5

D'an tadou ha mammou
E lavar Hor Zalver :
« Beilhit var eneou
Em eus prenet ken ker. »

6

Kroaz an ti d'ar c'hlanvour
Zo ive presius ;
Ennhi e kav sikour
Da veza gouzanvus.

7 — *Kroaz ar gador-govez.*

Kroaz ar gador-govez
A ro keuz d'ar pec'her.
Bet eo ken didruez
E kenver e Zalver !

8 — *Kroaz ar beziou.*

Ar groaz var ar beziou
He deus eun nerz dispar
D'ober d'ar c'halonou
Dougen pouez ar glac'har.

9 — *Kroaz an aod.*

Ar groaz, pa ve savet
E kichennik an aod,
A ro fizianz bepred
D'ar paour kez martolod.

10 — *Kroaz ar varn diveza.*

Pa zeui, da fin ar bed,
Jezuz evel barner,
E groaz a vo guelet
O lugerni en aer.

11

En eur velet ar Groaz,
An dud fall a greno ;
An dud vat gant joa vras
Er c'hontrol a drido.

12

Grit deomp, Salver Jezuz,
Dre verit ho poaniou,
Gant an holl dud eürus
Mont neuze d'an nenvou.

VII. — Kristenien da viken

Diskan

D'hor mamm santez Anna,
D'an Intron Varia,
D'hor Zalver benniget
Ni vo fidel bepred !

1

Hor c'halon baour mantret
Gant glac'har hag enkreiz,
Ni a zo daoulinet
Dirazoc'h-c'houi Guerc'hez !

2

Kurun hag avel foll
Varnomp zo dirollet,
Hor bro zo vont da goll,
Truez ! Mamm venniget.

3

Lezen Doue guechall
A rene kaër ar vro ;
Hirio lezen tud fall
He stlej eün d'ar maro.

4

Vel eur vanden chas mud,
Gant kounnar, noz ha deiz,
Emaint e-touez an dud
O klask mouda ar feiz.

5

Ni 'zo gwir gristenien,
Krouadurien Doue,
Savet en e lezen,
En e zoujanz ive.

6

Ni a zo kristenien,
Prenet gand gwad Jezuz,
Maget dre c'hourd'hemmen
Gant e gorf presius.

7

Kristenien, hor baniel
A zo kroaz Hor Zalver,
Ni her zao soun 'n huel
Bemdez, e peb amzer.

8

Eur brezel kriz meurbet
Zo great d'hor bugale
Ah ! n'o dilezit ket,
C'houi 'zo'o Mamm ive.

9

Petra dalv gwiziegez,
Mar kollomp hon ene ?
Ar skiant, ar furnez
A deu deomp euz an nenv.

10

Gwechall hon tadou koz,
Brudet 'vit ho furnez,
A glaske 'r Baradoz
Araok peb gwiziegez.

11

Skianchou 'zo netra
Pa z'eont enep Doue ;
Ni fell deomp dreist pep tra
Savetei hon ene.

12

Gwerc'hez, hor Mamm Zantel,
Roit sikour heb dale ;
E plegou ho mantel
Kuzit hor bugale.

13

E pevar c'horn ar vro,
Neuze ni holl, Guerc'hez,
Beteg heur hor maro,
Ni a gano bemdez.

VIII. — Laudate Mariam

Diskan

Laudate, laudate { bis
Laudate Mariam {

1

Laudate, Mamm zantel,
Dreist an oabl skedus
Hor c'halonou fidel
A bigno joaüs.

2

Ra jomot hor mestrez,
Stereden ar mor,
C'houi eo hor rouanez,
Rouanez Arvor.

3

D'ar pardaes, er grasou,
E ti peb Breizad
Gant Jezuz, hon Aotrou,
Ho meulomp dalc'hmad.

4

Var lein ar menezioù
Ar pastor denved
Varzu bolz an nenvou
A lavar bepred :

5

Var e vagig dister
Ar martolod paour
Lavar d'e vamm dener
Gant eur galon aour :

6

Gant an oad daoubleget
An tad koz en ti,
Diskabell daoulinet
N'ehan d'ho pedi

7

E palez kaër Jezuz
Bodet dizoursi,
Eun deiz ni vo eürus
En-dro da Vari.

IX. — Rouanez Arvor

(ton: *Lez Breiz*).

1

Rouanez Arvor, holl ho saludomp,
O Guerc'hez dinam, ennoc'h e kredomp (*bis*).

2

O Guerc'hez Vari, dre-holl ha bepred
C'houi voë gant Breiziz an Intron garet.

3

Guechall hon tud koz, sentus d'ho lezen,
En em vouestlas holl deoc'houi da viken

4

Hag a-c'houdevez, al le zo miret
'Vel en deiz kenta ma z'eo bet touet.

5

Hon Arvor a vev dre ho madelez;
Ni 'zo bugale deoc'houi da jamez.

6

Eus ho pugale, o Mamm, klevit 'ta,
Klevit ar bedenn hag ar bromesa.

7

O Mamm hor Zalver, evel hon tadou,
Ni ro da viken deoc'h hor c'halonou.

8

Mes prijit d'ho tro, arc'h a esperans,
Souten an Ilis, savetei ar Frañs.

9

Mar be ret difen he enor d'hor bro,
Ar Breizad kristen dispount a gerzo.

10

Dindan ho skoazell, epad an emgann,
Soudard, martolod, ra fae var an tan.

11

Ar micherour paour, al labourer kez,
A drid o c'halon gant ho karantez.

12

Mamm, roit ho pennoz d'eomp ha d'hon tudou,
Ha d'hor parkeier, koulz ha d'hon aochou!

13

D'hon tiegeziou ha d'hor bugale,
Ha d'hor mignoned zo er gear du-ze!

14

D'hor martoloded ho pennoz ivez,
I gas hoc'h hano d'an Douar-Nevez.

15

Skuilhit ho pennoz var hor soudarded;
Rentit d'ho baniel he gloar hag he sked.

16

Hag hed hor buez, euz ho krasou c'houi,
Ni hor bezo sonj, o Guerc'hez Vari.

17

Eus ar roc'h santel, pa vimp en hor bro,
Ar zonzj dudius ganeomp a jomo.

18

Endra bado 'r bruk var hor menezioù,
Karantez hor Mamm vo 'n hor c'halonou.

19

Rag ho pugale, o Guerc'hez santel,
A c'hed dreizoc'houi ar vuez eternal.

20

Holl en ho kichen en nenv, eun devez,
Fell dezo beza, Mamm a garantez.

X. — Kantik Intron Varia Rumengol

Diskan

Intron Varia Rumengol,
Guerc'hez galloudus, remed holl,
Roit deomp hirio, en han' Done,
Iec'hed ar c'horf hag an ene.

1

Lili arc'hantet o deliou
Var bord an dour zo er prajou;
Done dezho a roas dilhad
A skuill er meziou peb c'houez vat.

2

O Rumengol, pell amzer zo,
C'houi eo boked kaera hor bro;
Peb rozen geant, peb lilien
A zo disliv en ho kichen.

3

N'eus elestren ebet er prad
A daolfe kement a c'houez vat;
E Leon, Treger ha Kerne,
Ganeoc'h e klever c'houez an Ee.

4

Bleunia 'rit c'hoaz en ho kosni
E liorzik goudor Mari;
Rak hor mamm dous n'eo ket edro:
Pa gar eur vech eo 'vit ato.

5

Var an Arvor gant ar Verc'hez
Oc'h bet lakeat da rouanez;
Rumengol eo he merc'h hena,
Ganthi eo karet ar muia.

6

Hon tadou koz a ioa kousket,
E tenvalijen ar pec'hed
Maro: Var roudou peb hini
Ifern euzus o tigeri...

7

Var ar mean ruz e skuillet goad,
Hag er C'hrannou, e kreiz ar c'hoad,
A zindan derven Teutates
Tud veze lazet heb truez.

8

Tec'hit, doueou digalon,
Setu Guenole ha Grallon;
Tec'hit, tec'hit... Var ar mean ruz
Eo savet chapel mamm Jezuz.

9

E leac'h ar goad, dour ar vuez
A red e iliz ar Vere'hez;
He c'halon eo an eienen
Ne vezo dizec'het biken.

10

E Rumengol, ar pelerin
A bedo start, var e zaoulin,
A velo a dreuz e zaelou
Evel digor lez an nenvou.

11

Ma salud teir guech an aoter
En eur adori hor Zalver,
Teir guech e vezo benniget
Gant tri Ferson sakr an Dreinded.

12

Ma ra seiz guech tro ar chapel
Gant Ave an eal Gabriel,
Mari hen diouallo bepred
Diouz Satan hag ar seiz pec'hed.

13

Ha ma tigemer an hosti,
E galon ennan o virvi,
Ouz Jezuz e chomo stag mad:
Etrezho birviken kimiad.

14

Pelerined, grit evelse,
Kaout a refot grasou Doue;
Hag e vec'h deuet en eur lenva,
C'houi ielo kuit en eur gana.

XI. -- Kantik pelerined ar Folgoat

Diskan

Patronez dous ar Folgoat,
Hor Mamm hag hon Intron,
An dour en hon daoulagad,
Ni ho ped a galon;
Harpit an iliz santel!
Avel diroll a ra...
Tenn hag hir eo ar brezel!
Ar peoc'h, o Maria.

1

Eus an Arvor, ar gourre,
Ni deu d'ho saludi;
Holl ez omp ho pugale,
Holl ho karomp, Mari.
Tud ar gourre, Arvoriz,
Diredet omp hirio
Da bedi 'vit an iliz,
Da bedi 'vit hor bro.

2

E Rom hag e kalz broïou
Eo goasket an Iliz;
Peurlaeret eo he madou
Gant enebourien griz;
Hirra ma c'heller guelet,
Er mor z'eus tarziou guen,
Bagig sant Per zo strinket
Eus eur garrek d'eben.

3

Mar d'oc'h Mamm ar gristenien,
Mar karit an Iliz,
Hep dale deuit da zifen
Ho pugaligou geiz:
Araok ez a o labour
Gant bugale Satan...
Mall eo deoc'h dont d'hor zikour
Ha d'hon tenna a boan.

4

Diouallit na lavarfe
An dud fall 'zo er bed:
Guechall ez oa Mamm Doue
Dous hag eas da garet;
He diskouarn a ioa tano,
Klevet a rea raktal;
Hirio ez eo pounner-gleo,
Outi eo red krial.

5

Nann, nann... Oh! tavit pelloc'h,
Rag Mari, tud difeiz,
Morse ne d'eo bet tommoc'h
He c'halon en he c'hreiz;

6

Guelet eo bet o lenva
Var gern ar menezïou,
Bemdez ema-hi o paea
Hon dle dre he daelou.

Ar pastor hag an denved
O dezo eun ehan;
An aour, pa vez peur-garzet,
A denner eus an tan.
Bremaïk Jezuz a roio
E dra da beb hini:
D'ar re fall poaniou garo,
Ar peoc'h da dud Mari.

7

Araok mont kuit, o Mari,
Ni ra eur goulenn all:
Nikun n'helfe niveri
Holl c'houliou Bro-C'hall;
Peleac'h ema he gened,
He nerz, he vaillantiz!
Pegen izel eo kouezet
Merc'h hena an Iliz!

8

Patronez dous ar Folgoat,
Hor Mamm hag hon Intron,
An dour en hon daoulagad,
Ni ho ped a galon:
Ar Franz zo braz he enkrez,
Mont a ray da netra...
Outi sellit a druez...
Truez, o Maria!

9

Bras eo bet hor pec'hejou
Dister hor pinijenn;
Rak-se e dourn an Aotrou
E chom ar vialenn;
Red eo gounit hor barner,
Pe divoada er pri.
Allaz! n'hellomp hen ober
Nemet dreizoc'h, Mari.

10

Pell-zo c'houi 'zo bet choazet
Evit hor rouanez;
E neb bro n'o peuz kavet
Teneroc'h karantez.
Tud fidel a vandennou
A deu d'ho kaout beb bloaz,
Ha var hent ho chapelion
Ne jom eur ieoten c'hlaz.

XII. — Santez Anna

Diskan

Santez Anna, hor Patronez
Hor zikourit en danjer,
Ha bezit hon alvokadez
Dirag Jezuz, hor Zalver.

1

Saludomp gant devosion
An Intron santez Anna;
Lavaromp dezi a galon
En he chapelik ama:

2

Santez Anna, mamm ar Verc'hez,
A dra zur 'zo galloudus;
He merc'h en nenv 'zo rouanez,
Gwir vamm d'hor Zalver Jezuz.

3

Pep-unan da zantez Anna
Gant fizianz, en e boaniou,
A velomp oc'h en em voestla
Hag o vont d'he chapelion.

4

Ar vamm, evit he bugelig,
D'an Intron santez Anna
A ra bemdez eur bedennig
Hag a zesk dezan kana:

5

Ar zoudard, o vont d'an arme,
D'an Intron santez Anna
En em erbedo, ha neuze
A gerzo en eur gana:-

6

Ma teu an tourmant da c'houeza,
Ar martolod a bedo
E batronez santez Anna,
Ha dizoursi a gano:

7

Al labourer var e dachen,
Evit en em ziskuiza,
Dioc'h e dal a zec'h ar c'houezen
Hag en em ro da gana.

8

Ar pastor e bar ar menez,
E zenved en-dro deza,
'Lies a vech d'e Batronez
Oc'h eus klevet o kana:

9

O vont d'ar mintin d'e zervez,
Ar micherour a bedo
Santez Anna, e Batronez,
Ha gant fizianz a gano:

10

E pep korn eus a Vreiz-Izel
An Intron santez Anna
He deus eun iliz, eur chapel ;
Deomp holl di da bardonna.

11

Evel hon tud koz, Bretoned,
Enoromp santez Anna,
P'ez omp klanv, p'ez omp ankeniet,
Ne skuizomp ket o kana:

XIII. — Pedenn da santez Anna-ar-Palud

(var don: *D'hor mamm santez Anna*).

Diskan

Intron santez Anna,
Ni ho ped gant joa!
Mirit tud an Arvor
Var zouar ha var vor!

1

Mamm zantel da Vari,
Salud a greiz kalon!
Enor ha meulendi
D'hor Mamm ha d'hon Intron

2

Biskoaz n'eus ket klevet
Klemm eus ho trugarez;
Ar Palud benniget
Eo trôn ho madelez.

3

Dous eo bet d'hon tud koz
Tanva ho karante,
Ha ken dous ho pennoz
A vo d'ho pugale.

4

Selacuit hor pedenn,
Mamm garët Breiz-Izel!
Selaouit hor goulen
Bemdez en ho chapel!

5

Truez evit ar vamm
A velit ken aounik!
Dalc'hit, dalc'hit dinamm
Kalon he bugelig.

6

Truez evit ar paour
Dirazoc'h daoulinet!
Truez 'vit ar c'hlanvour,
O c'honsolit bepred.

7

Skuilhit er parkeier
Gliz pinvidik an Ee!
Skoazel d'al labourer,
Skoazel en han' Doue!

8

D'an den yaouank roït
Eun tenzor a furnez,
D'an den koz goulennit
Eur fin vat d'e vuhez.

9

Er mor bras kounnaret
Bagig ar pesketour
Spontus a vo lounket
Ma ne deuit d'he zikour.

10

En tarziou didruez
Kerzit, tud an Arvor,
Rag evel ar Verc'hez
Eo steredenn ar mor.

11

Bézit ive nerzus,
Soudarded Breiz-Izel:
He dourn holl c'halloudus
Vo ganeoc'h er brezel.

12

Evidomp holl ar bed
Eo tachen an emgân:
Oh! n'hon dilezit ket
Pa m'omp e kreiz an tân.

13

O Mamm santez Anna,
Dindan ho tiouaskel
Peger kaer eo beva,
Peger kaer eo mervel!

XIV. — Hano Santez Anna

(ton: *Bale Arzur*).

Diskan

Santez Anna, hano meulet,
E Breiz-Izel kement kare,
Hano dous, hano kaer meurbet!

1

Pe z'oun er boan hag en anken,
Pe z'oun evurus ha laouen,
Santez Anna! eo va fedenn.

2

Kriz ar brezel, tennou a zo
Ken a verv an tân tro var dro,
Soudard Breiz, tost ar mard!

3

Kentoc'h ar maro 'get an tec'h!
Santez Anna 'zo hir he brec'h!
Dreizhi en emgân me vo trec'h.

4

Bihan da vag ha bras ar mor,
Dinerz da stur, dispeg an eor;
Krena dlez, martolod Arvor.

5

Guelloc'h 'get goeliou ha sturiou,
Santez Anna, dre an tarziou,
A gas deomp d'ar ger hor bagou.

6

Pe gant da falc'h, pe gant da var,
Pe en ero stog an alar,
Start eo d'it labourer douar.

7

Pa vez re skuizet va divrec'h,
Santez Anna 'glaskan d'an nec'h,
Tre hon daou e lakan ar bec'h.

8

Var e vele pe 'n e gavel,
Pa velit gwall glanv ho pugel,
Petra rit, mammou Breiz-Izel?

9

Var hon daoulin 'ni n'em laka
D'her goestla da zantez Anna;
Sur omp teuio da barea.

10

Gant ho penn baz, poan o kerzet,
Guen kan ho pleo, c'houi daoubleget,
Tad koz, pe seurt pedenn peuz grêt?

11

Dridal gant dudi ha bennoz
Gant ar c'hleier a skiltr d'an noz:
Va mamm am galv d'ar baradoz.

12

Aour hag arc'hant, gened, mor braz,
Bolz steredennet an oabl glaz,
Santez Anna 'zo kaeroc'h c'hoaz.

13

En oabl, er mor, var an douar,
A vouez huel Breiz hen lavar:
Santez Anna n'euz ket he far!

XV. — Pedenn da Zant Korantin

Diskan

Sant Korantin, patron Kerne,
Diouallit mad hor bro;
Grit ma virimp lezen Doue
Beteg eur ar maro.

1

C'houi zo breman gant an elez,
Skedus ho kurunen:
Ni zo er brezel didruez,
Er boan hag en anken.

2

Eus an ifern eo deuet Satan
Evit mougla hor feiz;
Teurel a ra moked ha tân
E pep korn eus a Vreiz.

3

An dud n'o doa ket kalon gre
A zo dija d'an traon;
Mil ha mil all 'gouezo ive
Ha kreski ray hor c'haon.

4

Ar groaz, an iliz, an Aoter,
A gren beteg koueza;
Ma pad re bell ar barr-amzer,
Setu kollet pep tra.

5

E Kerne, menez ha traonien
'Zo d'eoc'h a berz Doue;
Glepet int bet gant ho c'houezen,
Dalc'hit start d'ho leve.

6

Ho preac'h 'zo dizec'het,
Mes bepred eo nerzus;
Dirazhi e ranko tec'het
Enebourien Jezuz.

7

Doue da dad, c'houi da batron,
Baradoz d'o ene,
Mari da Vamm ha da Intron:
Setu c'hoant tud Kerne.

XVI. — Sant Per, patron ar barrez

(ton: *Kantik Rumengol*).

Diskan

Aotrou sant Per, hor zant patron
Kreskit hor feiz, hon nerz-kalon,
Ma vezimp holl gwir vugale
D'an Iliz savet gant Doue.

1

Savomp hor moueziou da veuli
Hor patron mat, ha d'e bedi
Evel gwechall hon tadou koz,
Ma taolo varnomp e vennoz.

2

Pesketour lenn Genezareth,
Gant Hor Zalver, pa 'z eo galvet
Da zavetei an eneoù,
Rak-tal a lez e rouejou.

3

Hag hen da heul ar Pastor mat,
Bemdez gantan o labourat,
O kas kelou an Aviel
D'ar bec'herien, d'an dud santel.

4

E feiz zo krenv, ha d'Hor Zalver,
Oc'h embann mister an aoter,
E lavar: « C'houi, ha c'houi hepken,
A ro d'an dud gwir sklerijen. »

5

Dianavezet eo Jezuz,
Daoust d'e oberou burzudus,
Simon a lavar koulskoude:
« C'houi zo ar C'hrist, gwir Vab Doue. »

6

Ha Jezuz dezan a respont:
« Te a zo Per, ar gwir mean-font
A vo diazezet varnan
An Iliz santel er bed-man. »

7

Te vezo prins an ebestel
Ha kenta Pab an dud fidel;
Eus rouantelez an nenvou
Me roio d'it an alc'houeziou.

8

Krog en da stur, o pesketour!
Dre ma zaio gant herr an dour,
Da gas tud d'an eternite.
Morse da vag ne ray pense. »

9

E garantez a zo dispar,
Na tud, na madou an douar,
Netra outan n'en deus miret
Da vont da heul Salver ar bed.

10

M'en deus nac'het eur Mestr ken mat.
Evitan pebez kalonad!
Gant daelou puilh 'hed e vuhez,
E verk glac'har ha karantez.

11

Ha pa vo diskennet varnan,
D'ar Pantekost ar Spered-glân,
Rak-tal ez ay d'an eneoù,
D'o savetei a villierou.

12

Ar baianed, ar Juzevien,
A deui da veza kristenien:
Na poan, na trubuilh, na prizon
Netra ne drec'h e nerz-kalon.

13

It, o sant Per, breman da chom
Pell diouz ho pro, d'ar gêr a Rom,
D'ar gêr a vo kêr-benn ar bed
Gant gwad Hor Zalver dasprenet.

14

Goude labouriou ugent vloaz,
D'ho tro c'houi varvo var ar groaz;
Mes divar gwad ar verzerien.
E savo danvez kristenien.

15

Savit d'an nenv, pastor karet,
Eno gant Doue kurunet,
O! kendalc'hit da rei skoazel,
Gant ho pedenn, d'an dud fidel.

16

Patron benniget hor parrez,
Grit ma karimp ar virionez,
Grit ma klaskimp an nerz-kalon
E banked ar Gomunion.

17

Grit ma ouezimp, atao sentus
 Ouz an Iliz hag ouz Jezuz,
 Tec'het a-grenn, tec'het bepred
 Diouz an dizurz hag ar pec'hed.

18

Grit ma chomo grizioù ar feiz
 Doun e pep kalon en hor Breiz,
 Evel grizioù ar gwez dero,
 E kreiz kalon douar hor bro.

XVII. — Santez Jeann' d'Ark

(Var don: *Gwir vugale ar Verc'hez*).

Diskan

O Jeann' d'Ark, c'houi a drec'has ar Zaozon kriz guechali
 Hag a roaz ho puez 'vit dasprena Bro-C'hall :
 O! kennerzit ac'hanomp 'vit ma trec'himp d'hon tro,
 Gant enebourien hor feiz, enebourien hor Bro !

1

E Domremy, el Lorren, e velomp o c'henel,
 En eun ti var ar meazioù hag a gerent izel,
 Ar plac'hig en deus Doue dibabet a viskoaz
 Evit ober en hor bro kalz a vuzudou braz.

2

Eun deiz ar plac'h souezet a glev, vel eus an nenv,
 Mouezion dous evel ar mel hag evelato krenv
 « O Jeann' d'Ark, taolit eur zell var drubuilhou Bro-C'hall,
 Ha magit an foul start d'he renta dishual. »

3

Hag epad pevar bloavezh an hevelep mouezion,
 'Vel krenvoc'h krenva bemdez, a zav en he meazioù :
 « O Jeann, d'Ark, savit buhan, redit en han' Doue
 Da zigelc'hi Orlean, da zakri ar roue. »

4

Jeann', heb argila hirroc'h, e penn eun neubeut tud,
 Etouez ar c'hapitened o deus ar muia brud,
 A zailh var gêr Orlean, a c'hounez ar viktor,
 En eur grial a bouez penn ar « Veni Creator ».

5

Hag hep koll eun tamm amzer, dougennet gant he feiz,
 Jeann' a red 'dreuz ar Zaozon da gavout Charlez Seiz,
 Hag a lak an oleo sakr da redik var e benn,
 Evit renta er c'hiz-se startoc'h e gurunen.

6

Orlean he deus frankiz... Sakret eo Charlez Seiz...
 Jeann, he deus c'hoant do zistroi daved he denved reiz...
 Mes an enebour touet a c'houlenn he maro,
 Hag endro dezhi e sav meur a Juckas garo.

7

Setu guerzet d'ar Zaozon Jeann' ar verc'hez kadarn...
 Tamallet da nac'h he feiz eo kaset d'al lez-varn,
 Dirak, n'eo ket eur barnier, mes kentoc'h eur bourreo,
 Hag he barn da ve rostet e kreiz an tan ez-veo.

8

E Rouan an tanteziad, gant e deodou tan-flamm,
 A zailh brema gant fulor korf ar verc'hez dinam ;
 Hag houma gant eur vouez dous, pell diouz fallgaloni :
 « Va Jezuz, plijet ganeoc'h d'an dud-se pardoni. »

9

Kerkent meur a galon saoz a vel o dallentez :
« Buntet e vimp eus ar Franz, Jeann a zo zantez ! »
Hag e guirionez goude, Bro-c'hall euz peb emgann,
Dindan banniel ar zantez, a ra eur viktor splann.

10

Abenn pevar pe bemp bloaz, Bro-C'hall dichadenne
En em zav da c'hloar skedus an amzer dremenet,
Rak Jeann d'Ark, heb mar ebet, eus lez ar baradoz,
Varni ha var he armou a daol puilh he bennoz.

11

O Jeann' d'Ark, eus bar an nenv, mirit da vont da goll
Hor bro gaer ken dispennet gant eun avel diroll
A zav terr eus an ifern dre c'hinou tud direiz
Evit munga en hon touez goulaouen ar wir feiz.

12

D'eoc'h bennoz ha trugarez, enor ha meuleudi,
Holl a unan en eur vouez e kanomp gant dudi,
Da c'hortoz an devez kaer ma zimp d'ar baradoz
Da gana gant an elez hag ar zent, deiz ha noz.

XVIII. — Beleg da Viken

Var don : *Elez eus ar baradoz.*
Pe don : *Intron Varia ar Folgoat.*

1

Eus an Arvor, ar menez, diredet gant duñi,
Kanomp hirio da Zoue, kanomp e veuleudi.
Eun deiz kaer evel heman, deiz eun ofer'n nevez
A zo eun deiz a vennoz paret var eur barrez.

Diskan

Bennoz, bennoz d'eoc'h Jezuz, ha mil gwech trugarez,
Evit an enor dispar ho peus great d'hor parrez
O tont enni da zibab, hag enni da c'helver
Unan eus he bugale da vont ouz hoc'h aoter.

2

Evit ober eur beleg, Doue d'ar vadizian.
A verk gant e zourn santel ar bugel 'zo d'e c'hoant :
Ha dre ma kresk'en oad, e skiant, e furnez,
Aked Doue varnez an gresk ive bemdez

3

Evit ober eur beleg, Doue d'ar bugelig
A laka eur vamm gristen e tal e gavelig,
Eur vamm a oar luskellat ervat he bugale
E karantez ar Werchez, e karantez Doue.

4

Evit ober eur beleg, Doue gant plijadur
Abred a ro da glevet e c'halv d'ar c'hrouadur
Hag ar bugel dibabet, sentus ouz mouez Doue,
A lavar a greiz kalon : « D'eoc'h oun korf hag ene. »

5

Neuze, eus ar bed tennet, e vev er sioulder
Hag ar bedann, ar studi, pell a vez e breder...
Eun deiz, deiz a levenez, e weler var e benn
Dourn an Eskop astennet... Beleg eo da viken !

6

Skuilhit, Jezuz, ho pennoz var ho beleg yaouank :
Laoskit varnan ho krasou da redek puilh ha stank...
Ar beleg eo ho kannad, mignon hon eneo,
Ho peus karget d'hon hench' betek porz an nenvou.

Eu e zourn sakr ar beleg a zoug alc'houez an nenv ;
Gant e vennoz an ene a deu nerzus ha krenv.
O burzud dreist pep burzud ! D'e gomz Jezuz zoken-
Eus uhelder an nenvou davedan a ziskenn.

Jezus, an Holl-c'halloudek, Jezus, prener ar bed,
Jezus gwir Vab an Hini n'eus varnan mestr ebet,
Ouz komz nerzus ar beleg bemdez a zo sentus
Hag eus e lez a ziskenn var e c'her burzudus.

Santez Mari, mamm Doue, rouanez Breiz-Izel,
Roit d'hor beleg yaouank ho pennoz, ho skoazell.
E garg a zo dem-henvel, Gwerchez, ouz hoc'h hini :
Grit ma kendalc'ho bemdez da zantelât enni.

Sant Korantin benniget, eus barr skedus an nenv
Harpit ho peleg yaouank, ho prech deoc'h-c'houi zo krenv,
Ma c'hello var ho rondou pell varnezo kerzet
Ha skuilh ar wir sklerijenn ho peus d'eomp digaset.

XIX. — Evit renevezi promesaou ar vadiziant

Var don: Guir bugale ar Verc'hez.

Pa zeuas an dour santel da redet var hor penn,
Pa oue skrivet hon hano var roll ar gristenien,
Eur youc'haden a gounnar en ifern 'voe laosket
Hag eur c'han a devenez er baradoz klevet.

Nevezomp a greiz kalon hor promesaou santel,
Ha startoc'h eget jamez ra vimp d'ezo fidel ;
En deiz kaer-man unanet, holl gant eur vouez nerzus,
Kriomp : « Brezel da Zatan ! Karantez da Jezuz ! »

Araok ma oamp bet goalc'het e dour ar vadiziant,
E poneze varnomp, stouaz ! galloud an aerouant
Adaleg an deiz eurus ma 'z omp bet badezet,
Dloc'h e skilfou didruez ez omp bet diframmet.

Da zevez hor badiziant, hon eneoou goalc'het
A zo deuet da veza ti santel an Dreinded ;
Deut omp bugale Doue, gwir vreudeur da Jezuz,
Templon ar Spered Santel. O pebez stad eurus

Da zevez hor badiziant, karakter ar c'hristen
Zo bet var hon eneoou mouillet evit biken :
Merk a enor evidomp, mar gounezomp an nenv,
Merk mezus, a zizenor, ma kollomp hon ene.

Da zevez hor badiziant, 'voe graet en hon hano
Dion bromesa solanel a dileomp miret atao.
Vidomp e voe prometet trei kein d'an dronk-spered,
Hag henilla, hed hor buhez, Hor Zalver benniget.

Sionas deomp, re alies hor beus torret hor ger ;
Nag a wech omp bet dizent ouz monez Hor Zalver !
Nag a wech hor beus heuillet ha Satan hag ar bed !
Ah ! d'hor ger hiviziken, d'hor ger ne vankimp ket.

O deiz kaer 'vit hor parrez...! Promesa nevezet
Laouenna hor c'halonou, ha ni gav deomp gwelet
Eleiz a vugaligou o tont eus e gichen
Da zalc'her en hor parrez atao ar feiz kristen.

XX. — Peden araok kuitât an iliz

Var don: *Avant de quitter notre Mattre.*

1

Araok kuitât Jezuz Hor Zalver,
En em daolomp en e Galon
Eno hebken, eno e kaver
Ar peoc'h, an eürusted guirion.
Araok kuitât... etc... (beteg: Eno hebken.)

2

Deoc'h, o Mari, Mamm a garantez,
Kenavo a laromp ive.
Pa zigouezo termen hor buhez,
Hor c'hasit holl ganeoc'h d'an Ee.
Deoc'h o Mari, etc...

3

Ha c'houi, Fried santel ar Werc'hez,
Joseph, bet truez ouz hor stad;
Beilhit varnomp a hed hor buhez
Ha grit deomp kaout eur maro mat.
Ha c'houi, Fried santel... etc...

Kannaded Doue, elez santel,
Sellit ouzomp gant trugare;
Astennit varnomp ho tiouaskel;
Grit deomp kerzet varzu an Ee.
Kannaded Doue... etc...

5

Bezomp sonj mat eus hon tud varo,
Eus hor c'herent, hor mignoned;
Pedomp ha greomp piniñ 'vitho,
Ma vint dizale diboaniet.
Bezomp sonj mat... etc...

XXI. — Kantik ar Zilvidigez

Var don: *D'hor mamm santez Anna.*

Diskan:

O Mari, o mamm vat
Grit deomp kompren ervat
Eo ar zilvidigez
Labour bras hor buhez.

1

Savetei hon ene
Eo al labour kenta,
Merket d'eomp gant Doue,
Da ober er bed-ma.

2

Peb hini n'en deus bet
Met eun ene hebken;
Eur wech unan kollet,
Rapari n'heller ken.

3

D'in-me petra dalfé
Kaout madou ar bed holl,
Ma zaffe, da c'houde,
Va ene paour da goll?

4

Talvout 'ra hon ene
Dreist an aour, ar perlez;
Peb ene d'eun Doue
Zo koustet e vuhez.

5

O pegen diskiant
Ha pegen didalvez
Eo an den dizeblant
Ouz e zilvidigez.

6

Pa deuio ar maro,
Dioc'htu vezimp barnet
Hon ene 'vit afo
Vo salvet pe zaonet.

7

Hirio e c'hellomp choas
An ifern pe an Ee ;
Re zivezad vare'hoaz
E vezo marteze.

8

Chench a rankan hirio
Heb dale tamm ebet.
Ah ! kousto pe gousto
'Fell d'in beza salvet.

**XXII. — Pedennou
goude bennoz ar Zakramant**

Meuleudi da Zoue.

Meuleudi d'e Hano Santel.

Meuleudi da Jezuz-Krist, guir Doue ha guir den.

Meuleudi da Hano santel Jezuz.

Meuleudi d'e Galon Zakr.

Meuleudi da Jezuz e Sakramant an Aoter.

Meuleudi da Vamm Doue, ar Werc'hez gloriüs
Vari.

Meuleudi da Vari konsevet heb pec'hed.

Meuleudi da zant Joseph, pried glan ar Werc'hez
Vari.

Meuleudi da Zoue dre an elez hag ar zent eus ar
baradoz.

- TAOLEN -

	Pajen
Adoromp Doue	6
Aotrou sant Per	35
Araok kuitât	44
Da feiz hon tadou koz	10
D'hor mamm santez Anna	14
Eus an Arvor	40
Intron santez Anna	28
Intron Varia Rumengol	20
Kanomp holl, kristenien	12
Kinnigomp holl	1
Klevit, o mamm a drue	8
Laudate	17
Meuleudi da Zoue	47
O Jeann' d'Ark	38
O kristenien	3
O Mari, o mamm vat	45
Patronez dous ar Folgoat	23
Rouanez Arvor	18
Pa zeuas an dour Santel	42
Santez Anna, hano meulet	31
Santez Anna, hor patronez	26
Sant Korantin	33

— non —